

GWERZ ANN ESKOP GWENN,^(*)

*An Aotrou JOSEPH-MARI GRAVRAN, maro en
Kemper, ann deiz kenta a viz C'houevrer
1855, d'ann hoad a eur bloaz ha tri-ugent.*

Verbum crucis Dei virtus.

E komz ar groaz e ma perz Doue.

WAR DON ; Gwerz Santez Anna Wenet.

Rouanez vraz Breiz-Izel , Gwerc'hez vad Remengol ;
C'houi zo karet ho c'hano ha meulet gant anhholl ;
Astennit ho tourn war-n-hont hag e kaninn breman ,
Eur werz da eunn den santel , JOSEPH-MARI RAVRAN.

(*) L'Oraison funèbre de Mgr. GRAVERAN a été prononcée à la Cathédrale par M. Léopold de Léséleuc de Kerouera. Chanoine théologal de Quimper. Sa vie a été écrite et publiée par M. Maupied. Chanoine de Reims, Docteur en théologie et en droit canonique. Docteur es-sciences, etc.

Ce livre , si édifiant et si intéressant, devrait se trouver entre les mains de tous ceux qui ont connu et par conséquent aimé et admiré le saint Évêque.

Quant à notre humble Chant , il s'adresse à nos compatriotes , les bons habitants des campagnes , que l'Évêque de Quimper aimait à évangéliser dans cette vieille et si belle langue bretonne , qu'il parlait avec autant de pureté que d'élegance. Ces hommes, dont la reconnaissance ne s'arrête pas à la pierre tumulaire , garderont la mémoire de leur Évêque de même qu'ils ont gardé celle des vieux saints de leur pays et des hommes apostoliques qui les ont suivis , comme le père Mousoir et Michel Le Noblet . que les Bardes du XVII^e siècle ont chantés dans des Gwers qui sont très populaires en Bretagne.

Sant Kaourintin ha Sant Pol , Sant Briek , Sant Tual ,
Sant Patern , Sant Gwenole , Sant Herve , Sant Gwen-Eal ,
Diskennit war ar c'houmoul da rei d'in skerijen ,
Da ziskleria da Vreiziz buez ann Eskop Gwenn .

E Krozon e oa ganet Joseph-Mari GRAVERAN ,
Pa deuaz war ann douar , Doue a ioa gant-han .
Rag arog dont er bed-ma , da Verc'héz Remed-holl ,
Gant he vamm e oa gwestlet enn Iliz Remengol .

Ha dre ma kreske enn hoad e kreske e furnez ;
Dirag Doue hag ann dud , braz oa he santelez ;
Ann dud koz a lavare , pa vije o tremenn :
• Nep a vevo a velo , he-ma a rai eunn den ! . . .

C'hoaz e oa meurbed iaouank , pa vije , aliez ,
O studia he-unan 'harz mor Douarnenez :
Sevel a re dirag han ann amzer dremenet ,
Kear Is , ar Roue Gralon , ar burzudou zo bet .

Lenn mad a re da dri bloaz ha skriva da bevar .
Hag al latin , da seiz vloaz , a zispake dispar ;
E Kastel-Pol , e París en deuz bed meuleudi
Digant ann dud a skiant a gave er studi .

Daoulinet war Mene C'hom e klevaz mouez Doue :
« Ma Mab , te vo abostol , henvel euz Gwenole ,
» Enn d'ha vro gaer Breiz-Izel , e prezegi ar feiz ,
» Vel a reaz , gwechall enn-hi , sent ganet enn he c'breiz .

Pebez burzud eo he-man , bugale ann Arvor ,
Bezomp holl el levenez , d'hor bro eo eun enor ;
Kanomp gant daelou a joa , kanomp a vouez huel ,
D'ann Eskop Gwenn , er vro man , meleudi eternel .

Vel e traon menez Oreb , Moisez a grene ,
O klevet trous ar gurun , mouez an Aotrou Doue ,
Joseph a gren , a lavar da Roue an Envou :
« Ia , Beleg me vez , trugarez deoc'h , aotrou .

En he zao , war ar menez , e velaz en draouien
Abati Landevennek , kuzet gant ar spern gwen ,
Eno dindan ar c'hoz vein , an drez hag an illo ,
Ema brema ar Venac'h , kousket enn ho beiou .

Hag ann den iaouank a ia , var eün d'ann abati ,
Daoulinet war eur e'hoz bez , setu-hen o pedi ,
O pedi Sant Gwenole , eno gwechal abad ,
Da c'honlen digant Doue ma vo eur beleg mad.

Pa vel gant heol ar mintin , o sevel a uz Breiz ,
Tour kaer Iliz Remengol , e sonj e bars enn deiz ,
Ma oa gwestled d'ar Werc'hez eno gant he vam vad ,
Hag e treuz da vont d'he zi , breac'h vor ar Faou timad.

Stouet ebarz enn Iliz karguet a vurzudou ,
Evel kement a ia di , e renk skuilla daelou ,
Ha neuze e lavaraz a galon d'ar Werc'hez ,
« C'hoant o c'heuz e venn beleg , bezit ma fatronez.

» Santel eo karg eur beleg , ha pouner eo meurbet ,
» Mez c'hui eo ma fatronez , Itron ann *holl Remed*.
» Henchit ac'hanon bemdez , me a vez ho mab ,....
» Roit din ar c'hras da veza bepret eur beleg mad. »

He beden a zo klevet , mond a eure d'ar skol ,
Ha d'ann hoad a bemzek vloaz , ebarz e Kastel-Pol ,
En doa great ann holl studi a gas d'ar seminer ,
Ha kerkent e oa kaset da gloarek da Gemper.

Eno prest e tiskouezas he skiant , he speret .
Ann Eskop a ioa neuze den guiek ha brudet ,
A gas GRAVRAN da Baris , da skolach Stanislaz ,
Hag e seminer Paris goude e studiaz.

Er bloaz mil eiz-kant-seitek , vel ma oa belegeget ,
Dar seminer da Gemper e oa doc'h-tu galvet ;
Hag eno e pad nao bloaz , e kelenne bemdez
Da furmi , enn eskopti , ar Veleien nevez.

Balamour d'he wiegez e oa neuze hanvet ,
Da Vrestis evit Person ; eur garg diez meurbet !....
Rag-tal e kavaz ann tu : an Eskop a lare :
« Mond a ra ann traou gant-han gwelloc'h vit gan-hen-me. »

Rei a reaz eur Mision evel ma erruaz ,
Ha koueza a reaz war-n-han goude trubuillou-braz ,
Stoufa a reaz ho genou d'he holl enebourien ,
Ha renta reaz anez-ho kristenien vad zo ken !....

E kever ar bee'herien e oa karantesus .
Hag o fardoni a re , evel ma rea Jesus ! ...
Nag a bee'her deuz Doue , pell , pell dispartiet ,
Enn hent mad gant madelez . en deus bet digaset . . .

A in dorsetourien vrasha , e Brest er , galeou ,
A zo bet sec'het gant-han aliez ho daelou ,
Ha diskri a rea d'ezho meuli-hano Doue ,
Dont da vesa christenien , ha salvi ho ene .

Ann are'hant a c'houneze a ioa holl d'ar beorien ,
Gwizket kaer en'em gave gant eur goz sondanen ,
Ann draze a zo guirion : n'en doa gwennek ebet
Da vont a Vrest da Gemper , pa oa Eskop hanvet .

E mil eiz-kant daou-ugent , ann Eskop Poupliket ,
D'eur bloaz ha pevar-ugent , e Kemper zo marvet ;
Ar pastor a zo maro , hag ann aotrou Gravran ,
A zo choaset da Eskop , mez en despet d'ez han .

Mond a eure da Baris hag eno oe sakret
Gant Are'heskop ar gear se , ann aotrou Affer hanvet ,
Ha war he giz da Gemper e teu didrouz gonde ,
Da ziskwel d'he Veleien e kare anez he .

Bezomp holl el levinez , Abostol eo d'ar feiz ,
Komzou Doue zo guirion , ni a oar ze e Breiz ,
Brema potrbihan Kroson a zo enn Eskop braz ,
Spouronet war Mene-C'hom , gant Doue her c'blevaz .

Hep paouez he labourou , lavaret en deuz se ;
Evit mad he Eskopti , e c'hoanta he vale ;
Ha bepred , e brezonnek , e kar dre holl sarmon
Hag ann dud koz a lavar , e ve mad da berson .

Pa deuaz ar Republik , oa galvet da Baris ,
Da zifenn droajou ar Boibl ha droajou ann Ilis ,
Potret Paris a lare : « Eskop Kemper zo goaz ;
« Biskoaz den evel he-ma ne oa bet ama c'hoaz . »

E Paris e tispakaz e holl dalanchou kaer ,
Da ober lezennou mad , gant fornez ha douster ,
E France , hag er broriou-all , e komzer anez han ,
Gant ann holl e oa mealet Joseph-Mari GRAVRA

Ar General Kavagnak , potr stard ha den a feiz ,
A c'hoanteaz he henvel Arc'heskop e Paris ;
Mez refusi a raz kren , vil dont da Vreiz-Izel ,
E-touez he vogale , da veva , da vervel.

Erru en he Eskopti . e karaz adare ,
War ar meaz hag er c'heriou , prezeg lezen Doue :
Ker brao e oie hencha ar pinvidik , ar paour ,
Evit he holl vugale en doa eur galon aour.

Biskoaz ne laraz eur gomz da ober droug na poan ,
Karout a re he nesa evel-t-han he-unan ;
Evit ann holl karantez , madelez ha douster ,
S tu pen da ben buez hon tad , hon Eskop ker.

Touriou katedral Kemper , aboe pevar c'hant vloaz
A oa mezuz da velet , oant ket peuraehu c'hoaz ,
Eun devez e lavaraz , ker brao , enn eur c'houarzin ,
« Savomp holl , ma bugale , touriou sant Keourintin . »

Kerneviz ha Leoniz ha Tregeriz ive
A ro d'ann Eskop santel pep a vennek neuze ,
Ha touriou skeduz Kemper , en ear , a zao huel ,
Evit renta testeni euz a feiz Breiz-Izel.

Buez ann den er bed ma zo poaniuz ha c'houero ,
Dre eunn draonien a zaelou e renkomp mont d'hor bro ;
Pep hini a zoug he groaz , war lein Mene Kalvar
A dreuz trubuillou ar bed , ann anken ar glae'har....

Ne oant ket c'hoaz peurachu touriou ar gatedral ,
E oe laket gant Doue , enn eur boan vraz dispar ;
Da beurvelc'hi he ene , kent evit mont gant-han ,
E tigasaz eur c'hlenvet hir ha poaniuz d'ez-han.

Vel ma n'em santaz skoet , e rankaz mont timad
Da bedi c'hoaz da Grozon , war bez he vamm , he dad ;
Ha goude e Remengol , daoulinet e pede ,
O c'houlen eur maro mad , Baradoz d'he ene.

En he gerc'hen , ar c'hrign-beo , pe ar c'hanser hanvet ,
A ra d'ez-han , pad tri miz , gouzany poaniou kalet ,
Gouzany a eure , ep klem , ar boan hag ann anken !
Evel merzerien ar feiz en amzer ansien.

Evel Jests war e groaz , e westlaz . kent mervel ,
He vugale d'ar Werc'hez , patronez Breiz-Izel ,
Ha gant feiz hag esperanz , seder evel enn el ,
He ene kaer d'ann envon a njaz en eur self.

Pa oe klevet ar c'helou er pevar c'horn a Vreiz ,
Kalon ann dud a fraillie , gant glac'hар en ho c'breiz ,
Ann holl a wele dorek , o krial gand aaken ,
Allas !... maro eo hon tad , maro ann Escop Gwen !!!....

Beleien ha tud ar bed , ha c'hui pօorien Jesus ,
Intanvezet , minoret , c'hui holl dud malurus ,
Kollet o c'heuz ho mignon , ho pastor hag ho tad ,
Evidomp-holl , Bretonnet , ô pebez kalonnad !.....

Vel eur sant en deuz bevet Joseph-Mari GRAVAN ,
Evel eur sant eo maro , Doue a ioa gant-han ;
Ann holl a lar eo eur sant ; *rox Populi vox Dei* ,...
Gloar da Zoue , mouez ar bobl eo ive he Hini !.....

En deiz ma oe diskennet enn he vele douar
Ar bobl a Gemper , beuzet en eur mor a c'hlac'hар ,
A zougaz he gorf santel , e kear dre ar ruiou ,
Hag ann dud keaz a wele hag a skuille daelou.....

He gorf a zo e Kemper , he skevend e Kroson ,
E Brest , en Ilis Sant-Louis , e medi he galon ;
Ar bobl euz a Vreiz-Izel , en Ilis veur Kemper ,
Dre garantez deuz savet , evit-han , eur bez kaer .

Demp eta va c'henvroiz , da Ilis veur Kemper ,
Demp gant feiz ha karantez war bez hon Eskop ker ,
Eoo bermde e veler daoulinet war he ve ,
Tud an Arvor o c'houlen grasou digant Doue .

Vel Joseph-Mari GRAVERAN , bezomp guir gristenien ,
Bugale vad da Zoue , bezomp mad dar beorien ;
Karantezuz vit ann holl , er beo hag er maro ,
Kalonnek ha stard er feiz , vel ma oa hon tadou .

War douriou sant Kaourintin , euz adn env diskennet ,
Pastor mad , roid ho pennoz d'ar vro oc'h euz karet ,
Roid ho penediksion d'ar belerinet holl
A ia bep bloaz da bedi da Ilis Remengol .

Roid ho penediksion d'ann dud paour , ankeniet ,
D'ann dud a vor , a vrezel , ha d'ann holl Vretonnet ;
Roid ho penediksion ive d'hor berejou ,
E pere e kousk , e peoc'h , hon tadou , hor mamou.

Goulennit digant Done ma kendalc'himp ar feig ,
Feiz koz Gralon , Gwenole , feiz ar Sent koz a vreiz ;
Ha deiz ar varn diveza , e vo e'hoaz Bretonnet ,
En Iliz sakr Remengol , o pedi daoulinet !! ..

Ha brema , ma e'henvroiz , kanomp holl meuleudi ,
Kanomp holl gant levenez , gloar da Joseph-Mari ;
Eur Zant neve zo savet , en hor bro Breiz-Izel ,
JOSEPH-MARI eo hanvet , gloar dean , gloar eternel !!!..

I.-P.-M. AR SKOUR,

ANN AOUTROU PER KERLOC'H

PERSON HANVEC

MARO AN 17 A VIS GUENVER 1860.

*Memento præpositorum vestrorum qui vobis
locuti sunt verbum Dei : quorum intuentes exi-
tum conversationis, imitamini fidem.*

Hebr. XIII, 7.

Ho pet sonj euz ho pa-toret, pere o deuz pre-
geget deoc'h komzou Doue ; hag o velet penoz
hint maro, bezit, evel-ho, tud a feiz.

Sant Pol, hebr : châb : XIII, v. 7.

VAR DON : Eun Doue ebken a adori.

Kerloc'h , kousk e peoc'h , va mignon ,
Belek mad out bed e guirion ,
Doue , d'ha nesa c'heuz karet ,
Ar beorien noaz a c'heus goisket.

— 8 —

Karet a c'heuz ive , dreist oll ,
Ar Werc'hez , Itron Remengol ;
Gra brema e peoc'h da ziskouiz
En douar santel he Iliz.


Ken a zeuio en d'ha skouarni
Da zôn trompil skiltroz ar varn ,
Kalz krenvoc'h evit trouz ar c'huéor ,
Kalz krenvoc'h evit trouz ar mor .

Sant Kaourantin , sant Guenole ,
An Escop gwen Gravran ive ,
O deuz , en env , diguemeret
D'ha ene glân gant joauzdet .

Lavar dez-ho ha da sent Breiz ,
E kendalc'homp bepret ar feiz ,
Lavar d'ar Roue koz Gralon ,
E zomp bepret tud a galon .

Kerloc'h e palez an Dreindet ,
Ped Doue 'vit d'ha vignonet ,
Hag ez aint ive da repoz
Gan-ez e joa ar Baradoz .

I.-P.-M. AR SKOUR.



Montroulez , enn ty J. HASLÉ , Imprimer ha Levrer .